

KIS-655 – Br. **mediaouiñ, mediaouekaat**

(MME ha GE – 20 12 99 dre faks)

[MME] GEAK a ra gant *prezour kenwerzhel* evit *attaché commercial*. Petra soñjit eus **prezour mediaouiñ** evit *attaché de presse* ? Labour an dud-se zo bezañ hanterour etre ar genderc'herien hag ar mediaoù. D.l.e. *médiatiser (un livre)*.

[GE] Kaout a ra din e tere da ginnigadenn **prezour mediaouiñ**. An arbennadenn nemeti eo houmañ : hervez reolennoù an deverañ ez a *-où* da *-aou-* hag e tlefed skrivañ : **mediaaouiñ*. An damant d' an eeuned skrivañ ha distagañ avat, en degouezh-mañ, a zegas da derriñ ar reolenn. Ur gudenn damheñvel a savas pa voe anv da luniañ anvad an diskiblezh o plediñ gant ar mentoù : *mentoù + -ouriezh* Ø **mentaououriezh* : dibabet e voe skrivañ **mentawouriezh** (gant VALLEE e voe kentradet an diskoulm-se e degouezhioù all).

Emaon o paouez goulenn e ali digant YBAN. A-du eo ivez evit deverañ diwar *mediaou-*. Merkañ a ra ez eus kealioù niverus en-dro d' an termen *media* : **mediaouel** "a-zivout ar mediaoù", **mediaouek** "gantañ doare, blaz, trouz, h.a. ar mediaoù", h.a. Kemm a ve etre **mediaouiñ** "mont d'ar mediaoù, ober gant ar mediaoù" ha **mediaouekaat** "dont pe lakaat da vezañ divoud ar mediaoù" — kemm a gaver ivez, da skouer, etre *orgediñ* "kaout orged (ouzh)" hag *orgedekaat* "dont pe lakaat da vezañ divoud an orged". E se e ve gwell **mediaouekaat ul levr**, en ur virout **mediaouiñ** evel verb antrazeat ; kefridi ar prezour *mediaouiñ* zo redek ar mediaoù (evel ma vez re all o c'hastaouiñ — da aozer an *Alc'hwez bras...* an hini eo e skrivan !), e bal o vezañ *mediaouekaat* e varc'hadouezh.